

HISTOAR EÛS AR BUHEZ AN

# ITRON SANTES BARBA,

Pehiny so mat da veza reclamet oc'h  
ar maro foubit.

*Composet gant M. G. DU BOISHARDY Bales.*

**M**E ho supply compagnunez  
Da zellaou cana ar vuhez  
A Santes Barba binniguet,  
A nevez ezeo composet.

Ec bloas daou cant hag anter cant  
Dindan Maximin an Tyrant,  
Eues à Noblanç bras meurbet,  
E Nicomedi é oue ganet.

E Tut à oa Idolatret  
A corf, à calon, à speret;  
E Tat d'ar Christenien garo,  
A' rea o laquat d'ar maro.

Mes ar verc'hes Santes Barbä,  
Nemet JESUS ne gar netra,  
Christenes é voa evit certen,  
A souten bras d'ar Christenien.

Oc'h é beza caër meurbet  
Gant ur Prinç bras voe gouleunet,  
Hag é voa ganta desifret  
Evit é cahouet da priet.

He Zat à commandas defi,  
Accepti souden ar parti;  
Mes y à respontas neuze,  
Ne raye James andrazé.  
O fongsal gallout é dompti,  
Gou'e'hemen à eure defi,  
Arren en un tour er prison;  
O. clasq é rengi d'é rzon.  
Eno é cavas Doué é Zat,  
A renverfas gant un tol troat,  
Da JESUS-CHRIST en em re  
Corf hag ené à galon bras.  
Ar compsou-man à lavaras,  
JESUS so maro er Groas,  
Voui à rân d'ho Majesté,  
A galon ma virginité.  
Neuze souden dre Miracl bras,  
Sin ar Groas quen don é gravas  
Gant é bes en ur men calet,  
E effaci ne allez quet.  
Goudefe é commandas prest,  
Ma vise great tri prenest  
Evit saori an Drindet,  
Ha care à galon parfet.  
E Zat andrase pa velas  
Ous ar Santes é goulennas

Petra signif quement. sé.

So gret dre ho autorité.

Evit enori an Drindet

Over ameus commandet,

An Tat, ar Map, ar Speret glsn,

A so tri Person en unan.

Tri prenest so voar ur prison,

Un Doué so en tri Person;

Mes va entent, ne allac'h quet

E deifot beza badezet.

Zat pa emeus commancer,

E livirin deoc'h ur secret,

Cridi à ran é JESUS-CHRIST,

Ha drouc à ran me ma oc'h trist,

Souefet omp ous o guelet,

E tresoc'h c'huy Idolatret,

Ous o guelet o adori,

Douéou so gret à mein ha pri.

Me ne ran quet à estim bras

A Juppiter nag à Pallas,

Sathan en deus-y invanter,

Evit col ar pobl eus ar bet.

Ur re à so Ægyptianet,

Nag à ador ar Serpantet,

E special ar Crocodil,

A so voar ar rivier an Nil.

Darn al à ador un Egen ;  
Ur fort al à pet un Azen ;  
Hag an dut à Alexandri  
A ador ar c'has ar c'hi.

E tresomp ny oll Christenien ;  
A ador un Doué mui quen,  
Pehiny à so an Autrou,  
Eus an doüar, hag an Evou.  
A psd palamour da Zoué,  
O pet truez ous oc'h ené,  
Lest à Lesen-se milliguet,  
Pe autramant ezoc'h daounet.

E Zat neuse pa é clevas,  
Dre ur coler bras é respontas :  
Effrontet out en assuranç,  
Comps er façon-se em presanç.  
Ya, ret eo assuramant,  
Ez pez d'é collet da squiant,  
Adori un den so crouguet  
Evit crimou hep mar er bet.

Va Zat lequet voe d'ar maro  
Gant ar Jusevien en é vro ;  
Mes va Zat ne ententit quer,  
Pa ne vet-se é voamb collet.  
Da hennez en deveas va prenet  
Va Zat, ezom-me demeset,

Brassoc'h eo sur assuramant  
Evit Maximin an Tyrant.

Hennez en devez gret à neers,  
Quement à velomp er bet-ma,  
Hag à roit ur plaç à repos,  
D'ar Christenien ar Barados.

Mes ar re na credint enna  
Pa dui da varn ar bet-ma,  
O condauno d'an tan griffas,  
N'en devez poan à ve quen diulas.

En ur coler é antreas  
E clezen dioutan à tennas,  
E treufi à fallas-deza,

Mes Doué ne duirie quet ganta!

Redec à eure voar é lerc'h,  
Mes ur roc'h quet gien hag an erc'h  
Evit é conservi antier

En em digoras dre an anter.

Goude-se é voue quemeret;

Ha gant corden amarret,  
Ha d'ar Prefidant Marcian  
E Zat é livras é hunan,

Ar Prefidant pa é guelas,  
Oc'h ar Santes é goulennas,  
Dime promptamant livris,  
Pe sort Doué à adorit ?

Credit-u certain, Presidant,  
Christenes omp assuramant,  
Ha nedeus nag aour na tourmant  
A alle sench va sentimant.

Ho Douéou n'odeus quet à gallout,  
Na da ober, na mat, na drouc,  
Rac-se ezeo bras o fazi  
Laquat ar pobl d'o adori.

Spüeset bras om-me gueneoc'h,  
Va merc'h truez ameus oufoc'h,  
Quitteet ho Lesen affo,  
Pe autramant ezoc'h maro.

Mar quirit sench à santimant,  
Me royo deoc'h aour, hag arc'hant,  
Hag ur Prinç bras à priet,  
O care à calon parfet.

It ganto é perdition,  
JESUS eo va tensor guirion,  
Bras ve an den ambitius,  
Ma na ve contant à JESUS.

E Zar neuze pa é clevas,  
D'ar Presidant à lavaras;  
Autrou Presidant gret justic,  
Rac houma so leun à maliç.

Rac-se, grit justic me o pet,  
Ha desñ na fahet quet,

Pe me scrivo evit certen,  
 Ezoc'h evit ar Christenien.  
 An Impalaer dre e Arret,  
 A ordren ma vianp losquet :  
 Mar falsie credi er vat,  
 Ezoc'h assur da coll ho stat.  
 Neuse souden voe divisquet,  
 Ouch ur pilier e voe staguët,  
 Ha dispennet gant scriffellaou,  
 Ma quouezé e c'hic a pessaou.  
 Un horror bras voa e guelet  
 E goat virginal o redec,  
 Ha ne voa den bras, na bihan,  
 Na gouellent oll guitibunan.  
 Goude d'ar prison voa casset  
 E bassefos e voa laquet,  
 O clasq dont a ben a nesi,  
 Autramant e disesperri.  
 Neuse souden voe visitet  
 Gant JESUS-CHRIST Salver ar bet,  
 Pehiny en ur touch outi  
 A cure fallo anesi.  
 Barba va merc'h hopez couraich,  
 Rag ar Presidant a arraich,  
 Ouzoc'h a deffaut va quittaat  
 Da adori Douéou o Tat.

JESUS n'am abandonnet quet,  
Mar plich gueneoc'h va ficouret,  
Ma illin fouten constamment  
Evit ho gloar pep sort tourmant.

An Heaul, al Loar, hag ar Steret  
A vez quent mil guech distruger  
Hep quet ma fasienn deoc'h,  
Ha n'am bez sourci à hanoc'h.

An eil ternos é voue tennet  
Evit beza interroget,  
Hag é voue roet desl da choas,  
Renonci, pe tourmanchou bras.

Hy fortifiet gant Doué,  
Prest à respontas d'ar Roué,  
Lavaret ameus deoc'h desla

Va sentiment hep nac'h netra.

Birviquen james da senchan

Ar pes à lavarau breman:

Va JESUS à so em c'halon,

E Varo, hag é Bassion.

Hag à vezo é virviquen,

Evit nep gloar, ha nep anquen,

Rac-se Tyrant depech afo

Deus d'am condauni d'ar maro.

An Tyrant-se gant é arrach,

A laquas dispen é bifaich,



Hag ar c'hic divoat<sup>9</sup> é costaou ;  
Gant cribou hoiarn ha scriffeilaou,  
Gant goulouennou allumet  
E goulou à voue rostet,  
Hag é divron à unnanaou  
Distaguet gant rasouéraou.

Tennet voue goude é noas beau,  
Goloet hep quen gant é bleau,  
Gant ur gouabren guen meurbet,  
E goloas Salver ar bet.

Voar é pen an taouliou morzel  
A scoe gant quer bras horrol,  
Ma crene memes ar pave  
Gant taouliou à receve.

Da velent ne allent quet outi ;  
O deus songet é condauni,  
D'ar-fin da veza dispennet  
Voar ur chaffot à voa dressef.

Ar Bourreau gant truez outi,  
Ne dipenne quet anefi,  
E Zat bourreau ar cruella  
En em offras d'é dipenna.

Neuse é eure ur peden  
Da Zoué evit ar Christenieng  
Ma plige gant Salver ar bet  
Accordi des<sup>9</sup> ur requet.

Goulen à eure oc'h Doué  
Evit piou bennac é ped-sé,  
Na varvo quet subitamant  
Abars receo é Sacramant.  
Un Æl neuse apparissas,  
Ha d'ar Santes à lavaras:  
Barba n'ho pet doutans er bet,  
Accordet eo d'oc'h o requet.

Ur Curun à gloat à dougan,  
Breman souden d'ho curunan;  
Rac prest oc'h da vont da velet  
Doué, ar Sent, ar Sentelet.

Un taul cense digant é Zet,  
A dispartias evit mat,  
E corff eurus dious é fen,  
Hag é lammas à pep anquen.

Un taul gurun dioc'h en éa  
A foëltras é Zet goudesé;  
Quement all evit pasamant  
A c'hoarvesas gant an Tyrant.

**CANTICQ SPIRITUEL EVIT**

*an Annonc retendes er Purgator:*

Vour un ton revez.

**N** Obl, ha partabl, coz ha ysoüanc,  
So er bet en oc'h aïsament,

Gant ar madon deoc'h dastumet,

Gant nep se goude teu mantet.

Ne songet quet er bona etuel

A anduret goude metvel.

Ma na ve gret guit pinigen

Abars ar maro pen dre ven.

Ho tut, ho querent mignonnet,

Cals evidoc'h o devez gret,

Ha cry, ha goulenn er flammou

Er Purgator ho pedennau.

Mardoch quet cry à galounou,

Pe na ctedet quet no foaniou,

Clevet un exempl rapportet,

Gant nep à zo bet o velet.

Santes Christina<sup>e</sup> lavar

Retournet bet voar an deüar,

Da anduri poaniou garo

A fetepans d'o delivro.

Pa voe é gorff d'an Iis casset

Da entetrey gant pep respet,

He presant compagneuz vras

Saver ens e arc'h é laras.

N'emboa quet à retardament,

Ne vean brema m'embise c'houar

Larguet à you er Barados

Gant ar Gueric'heset da repos.

Pa voa ma ené parriet

Gant an Alet é voan casset

Da velet ur plac da ha tenvel

10

Carguet à poaniou ha glac'kat.

O veza souïset meurbet

O velet ar poaniou diremet,

E goullis hac Iffern voc

Digant an Alet am casse.

Sallocras emezh an Alet,

Ar Purgator eo à velet,

Deut da velet an Iffern breman

Differanç poaniou d'arreman.

Incontinant é voan casse

Da velet an Iffern milliguet,

N'en deus reant den voar an douar

A disclerie he sort gouar.

P'amboa guelet ar poaniou griez,

Ha cals eus ma anaoudeguez

Dirac Doué é voan casse

Dirdal à ris oc'h é velet.

Ma merc'h var, emeza Doué,

Ma Bataos so sur didé,

Eus à brema meritet mat

Gant da verc'hret, hag œuvrou mat.

Er Purgator oc'h eus guelet,

Allas! cals à enéou poaniet

Goulen à reont soulagant

Den anezo n'endeus damant.

Mar gueres retoura é buhé

Da ober pinigen evité,

Me rei dit mercz, ha sicour mat,

Da recompanç à vo anat.

Wag ezeon retournet é buhé  
 Dre compassion embœa outé,  
 Ha da rei advertiffimant  
 D'ar pec'herien n'em amant.

Rac - se na vet den souïeset  
 Arpez biscoaz n'oc'h eus guelet;  
 A rin er bet abers Deué  
 Da delivra an anaoun - sé.

Quer buhan Santes Christina  
 'A lavaras ado d'ar bet - ma,  
 D'ar pec'het, ha d'ar pec'herien  
 Evit commaç ar pinigen.

Gant an donger ne alle quer  
 Chom é quichen pec'het er bet,  
 A dabel hi à santé  
 Ar flair dongerus anesé.

Dre ar vertaz eus à Deué  
 E begou ar guez en em lequé  
 E begou an tourou uhala  
 D'ar pevar avel da foïieta.

Ur vech he zut ganti nec'het  
 O songeal é von disquiantet,  
 Ps gant an dreuc xl passedet,  
 He laquas er prison ezrect.

Hep rei desî tam, na banne  
 Queit à ma vea dalc'het enne,  
 Mes hi à este he feden  
 Da pidi Deué d'é fouten.

Dre miracl ho leiz à lais

34  
A savas é divron ar Santes,  
Pe gant hiny en em vague  
Queit à ma voa er prison - sé.

Pa voa delivret a hané  
Splantet er bursut eguis - sé,  
En em taule é creis an tan  
Er fournelou da cahouet poan.

Ha pa gerret ur forn bennac  
En em plante erates mat  
Ebars da lesqui, da dezvi  
En ur erial, ha deplori.

Ha pa sortie eus an tan  
En em cave yach quer buhan,  
Goude ar fort anquen andarin  
Dre ar permission D'vin.

Pa vele canter o virvi,  
Nag ebet lichou he nepti  
En em rael ebars voar he fen,  
Da paredi quic, ha crochen.

Pa velle an douar sornet,  
Ar frim, sclaç, an dour clerer  
Voar ar cler an noas é chommé  
A oss ar pemp, hag ar c'huec'h de.

Pa tremene ar milinou  
Ezac er pourrot à vechou  
En em leque ebars à chuen;  
D'an dour d'á canno corf, ha pen.

Dre ar verta oc'h à Zoué  
Aech é unan en em poulsé

Er vilin entre an daou ven,  
Da vela é corf pen dre ben.

Hi à ye alies en nos  
Pa vise ar reall e repos  
Voar ar rot é creis ar plagen,  
Ma tetter an torfetourien  
He unan evit en em crevi,  
Ha tetri é oll hisli.

Daze marc'hat voar creis an dé  
Oc'h ar potañ en em crougué,  
Ha gant all laezront evellé,  
An daou, an tri dez é chommé.

Neuse ar corden à corré,  
D'ar forestou en em transporté  
Da ober pinaigen nevez  
Emesq ar stroez, hag ar losnet gouez.

En Ilison ar beselou  
Alicz etouez ar c'horffou  
Eus an dat varo en em planté  
Da cahout ar flair anezé.

Erouez he fori villeni  
Da eüela, ha da deplori  
En em dalc'ho aher ar bec  
O velet Doué offancet.

D'an aüter nos é coustumé  
Savel da voner da valé,  
En ar joüal é nous beo  
Da guervel ar c'has d'é rago.  
Pa vise roguet dispennet

x6

Gant ar ~~chas~~ en nos, é guelfet  
Oc'h en em ruillat, en em ftelegeo  
Dre an binchoù vill à garo.

Ha n'endeo poaniou arreman  
Marboa biscoas gueft er bet-man  
A commette ar Santes-man,  
Daou bleas daou-uguent hep hean.

Ya Christenien ahet queit-se  
Ar Barados à diouere,  
Hep caoüet quen occasion  
Nemet truez oc'h an anaoüs.

Credomp erfar dioc'h quement-man  
N'endequet-neubeut eo ar boan  
A ra Doué da andri  
Er Purgator da pep hini.

Ha quemeromp compaffion  
Oc'h an anaoün guir ræfon,  
Ha Doué à vo truezus  
En hon andret viomp cablus.

Pedomp evito calonnec  
Evel à garemp à ve cret,  
Evidomp oll pa vezo ret  
Monef d'ar poaniou hevelep.

F I N.

E QUEMPEL,

GANT IAN PERIER, Imprimer ha  
Libret eus an Escopiy Queref.